

8N1-4-005

13.

Keit 'ma vo bruk er meneziau,
Ha d'ero stard en hor c'hoajou,
En hor c'halon ho karantez
A vo birvidik da jamez.

14.

Kristeniën vad a Vreiz-Izel,
Pedit, pedit en he chapel,
Hag e dôr aour ar Baradoz
E vo laouën ouz ho kortoz.


PERMIS D'IMPRIMER :

Quimper, le 15 Février 1889.

Ém. FLÉITER,
Vic. gén.

E chapel Intron Varia Kergoat ez' euz daou
Bardoun : ar c'henta da zul ar C'hasimodo, hag ar
Pardoun braz da zul goud'an Assomption. Ar bêle-
rinet a c'hell gounit eun induljans plerier o kovez,
o kommunia, hag o lavaret pemp *Pater* er chapel.

Kemper, mouller an Eskopti.



KANTIK

INTRON VARIA KERGOAT

E PARREZ QUÉMÈNÈVEN

Ton : Intron Varia Rumengol.

DISKAN

Intron Varia Kergoat,
O patronez ken dous, ker mad,
Er bed-ma roit d'eomp ho pennoz,
Hag er bed-all ar Baradoz !

1.

Salud, verelaouën skeduz,
Salud, liliën dudiuz,
Salud, salud, Güerc'hez dinamm,
Salud, hon Intron, hag hor Mamm !

2.

Koant e tigor var ribl ar ster
Ar rozen d'an nevez amzer,
Ha c'houi, fourdilizen an Êe,
Zo pur ha kaër e pep mare.

3.

An durzunel hag ar golvan
A gav eun neiz d'ho re-vihan ;
Mez ho chapel, Mamm benniget,
Setu va neiz muia-karet.

4.

Bep bloaz d'hor bro guiniliet
O tont eüruz a vez guelet,
Bep bloaz, bemdez, ho tud fidel
A zired eüruz d'ho chapel.

5.

Gant he zaë mein dantelezet
'Vel eur rouanez eo guisket :
Kaëroc'h chapel, hervez an holl,
Ne z'euz nemet e Rumengol.

6.

Var an Thabor, eme sant Per
Mad oa beza gant hor Zalver,
Mad eo d'eomp ive chomm ama
Dirak hon Intron Varia.

7.

Dous eo d'eur vamm deiz he gouël
Skuill he bennoz en he chapel,
Skuillit 'ta var ho pugale
Puill ho pennoz euz bär an Ee.

8.

Roït, Mari, d'an dud seyzet,
Roït levez, ha yec'het :
E kreiz ar mor, e kreiz an dour,
Mari, bezit ouz hor sikour.

9.

Goazed, mere'hed o tiwoada
Dirazoc'h a voar daoulina :
Ni ho ped, Mamm garantezuz,
Outho'grit eur zell truezuz.

10.

Pell ato diouz Qéménéven
Kasit ar c'hlenvet, ar voçen,
Ha diouz an tân, diouz ar pec'het
Hon diouallit, Güerc'hez, bepret.

11.

Selaouit, m'ar plij, hor peden,
Da bep-unan roït he c'houlén,
D'an dud yaouank buez vertuzuz,
D'an dud koz maro evuruz.

12.

M'ar kollan ho sonj, ô Mari,
Ra vo skoët va izili,
Ra vo va zeod holl dizec'het,
Ma n'ho meulan, ô Mamm garet !